

Plin ton doubl : Bravig ez eo bale

Er bloaz paseet oan dimezet, |
Bravig ez eo bale | 2 wech
Me 'garfe biken vijen bet, |
Bravig ez eo bale, bale |
Bravig ez eo bale met glav a ra bemdez. | 2 wech

Me oa dimezet gant unan
Na oa na bras na re vihan.

Na oa na bras na re vihan
Met un tammig oa feneant.

Pa lâren de(zh)i ober un dra
'Kichen an tan 'a da dommañ.

'Kichen an tan 'barzh he gwele
Ha 'lâre din-me mont ivez.

Ha me a oa ken sot hag hi,
Teurel va botoù mont ganti.

Hag ur pennadig goude-se
'Oa leun an ti a vugale.

Pemp war ar bank, per er gwele
Se rafe nav a vugale.

Nav all zo bet digant Doue,
'Rafe triwec'h a vugale.

Merc'hed yaouank a blij-me,
Ne blij ket din ar vugale.

Paotred yaouank, pa zimezont
Ne ouzont ket petra 'reont.

Merc'hed yaouank pa zimezont
A oar mat-tre petra 'reont.